




LOUARNIG

Niverenn 0



Bevet an hent-houarn



Beilhadeg Blevék



Roue an Nevezamzer



Ar maniok



Amañ, e broioù Europa, e tebromp kalz toazennoù, avaloù-douar pe riz. E broioù-Afrika ivez e tebrer kalz riz met ivez eus ur blantenn a gaver eno a anver ar maniok, pe yuca.

E meur a vro eo ar maniok legumaj diazez ar magadur. Evel an avaloù-douar eo ar maniok un dorzhell.

Ar merc'hed eo, peurvuiañ, a zo karget da zastum ha da aozañ ar maniok.

Skrid ha luc'hskeudennoù gant Frédéric Lavail.



Ur wech tennet eus an douar, eo dav dibluskañ ha gwalc'hiñ an dorzhell. Goude e vez soubet en dour e-pad daou zevezh ha rasklet.



En em gavout a reer gant un toaz dourek a ranker leuskel da repoziñ un devezh a-bezh. Diouzh an noz e siler an toaz en un tamoez evit tennañ dioutañ kement neudenn zo. Goude e lakaer anezhañ en ur sac'h lien evit dizourañ anezhañ.





Ur wech dizouret e vez ruilhet an toaz e delioù palmez prientet an deiz kent. Bervet e vez ar bizhier maniok-se. Tost un eurvezh e pad.

Ur wech int distanet e c'heller debriñ anezho pe lakaat anezho da boazhañ en-dro. Bez' e c'heller lakaat anezho da boazhañ war ar glaou bev.

Bleud a c'heller ober ivez gant ar maniok. Ur wech rasklet e laosker anezhañ da sec'hiñ dindan sklêrijenn an deiz a-raok e bilañ munut e doare poultrenn.

Mat-tre e poulz ar maniok e broioù-Afrika, ha pa ne vefe ket a orin eus ar c'hevandir-se : eus Amerika ar Su emañ o tont. Magadurus-tre eo ar boued-se.

Marteze az peus debret dioutañ hep gouzout dit. Du-mañ e vez debret ar maniok e doare an tapioka, a zo un doare all c'hoazh da brientiñ ar maniok.

